

Au fol.° 101 recto, seulement le titre :

(101 recto)

Dom Iann Derrien
—

[rien aux f.° 101 verso et 102 recto.]

(102 verso)

Dom Iann Derrien
—

— Dom Iann Derrien te a zo Kouket
War ar plun fin, me ne maon Ked !

— Piou zo aze d'ar poent ma ?
Pellik en noz e zeo dija :

— Dom Iann Derrien me eo ta vam,
Zo er Purgator e Kreis ar flam,

hag a vezo da virviken
Ma nem sikoures, Dom Iann Derrien !

Pa voan war an Douer o Kerzet
Eus ho tougen ma mab Belek
Da Sant Iann moa laret monet ;

Na da Sant Iann, a d'ar Teodet,
A da Sant Jakes riniget ;

(103 verso)

A da Sant Jakes a Durki
hir eo an hent, fel eo mont di !

An anaön Kes a hirvoude ;
Dom Iann Derrien, en Konsole.

— Tewet, ma mam, na volet Ket,
Me rei ma veet sikouret.

60

Ma mammik paour din a leret,
Petra cheus c'hoas war ho speret?

— Daou guennet o klefoant d'ho moëreb
Reze c'hoas so war ma speret.

— Tewet ma mam na welet ket
An Daou guennet se vo p'êet.

Dom Jann Dervien a lavare
D'he c'hoar henan tri de goude :

(104 verso)

— Dastum din en eur fakik veac'h,
Eun toulllet archant, a lienach,

Da se'hi ar c'hoez hag an daëro
Me a ia breman da foëta bro.

— Petra an torfet o c'heus gret,
Ma er mes ar bro e ranket monet?

— Me ia da Sant Jann, a d'ar Teodet,
A da Sant Jakes viniget,

A da Sant Jakes a turki,
Euit ta vam a ma hini (1)
hir eo an hent, pel eo mont di!

— Ma vije ouzin e sentjac'h
Vije Kas Kannad e rajac'h.

— Kannadet sur 'ne gasinn ket,
Me ma human renko monet.

(105 verso)

Dom Jann Dervien a lavare
Deus er ger pa na sortie

— Ma na retornan varben c'hoec'h mis
Gret ma eisret ha ma servis.

(1). - Le vers est ajouté, au crayon, dans l'interligne entre le 1^{er} et le 2^e primitifs de la strophe.

Gret ma eüsvet ha ma servis
 Et ma de-a-bla herve ex his

Pa erruar e bord an od
 Karas eur batiment war flod.

(106 verso)

— Na mest al lestr, lezit-hu din
 ha c'houi em c'hemerfe n'ho ti?

Petek bro Spain ma Stremenet (1)
 Peet vefet vel ma Keret.

Pa woant war ar mor em lestreet
 Ar mest en deveus lavaret:

— Pignet da vek r' wern huelan,
 Da c'houi pelec'h ez omp aman?

Ar verdidi a lavarent (2)
 War bont ^{al lestr} pa ziskennent neuze.

— huelan ma hellemp e zomp bet
 Na netra na momp bed gwelet

Nemet taer (3) lestr bras a gverniet
 An momp e zint moroet!

(107 verso)

Ar moro bras a lavare
 D'ar mestr al lestr p'hen salude:

— Na mestr al lestr, lares-te din
 Petra e t'eus kurzet n'ez ti?

— Na n'eo ar paour Dom Yann Derrien
 Zo arze c'hober pinijen.

(1). — Mot ainsi écrit dans le ms.

(2). — Les lettres nt me semblent avoir été ajoutées.

(3). — "Taer" écrit en surcharge sur un mot que je n'ai pu lire.

O c'h ober finijen garo
Evit he vamm a zo maro.

—
Ar moro bras a lavare
Da Dom Yann Derrien an de se :

— Pe renonç a ri d'as toue
Pe me stollo war da ben, aze.

— Va zollit e lech ma Keret,
Evit d'am Doue ne renonçin Ket.

Ne wa Ket e her peur lavaret
War he pen er mor ne voa tolet.

(108 verso)

—
Dom Yann Derrien a we Klevet
Er goelet ar mor e lavaret :

— Otro Sant Jakes viniget
Goël a ren, ho iliz hag ho veret.

Di, me a moa c'hoant da vonet
Teir offern em boa da lavaret.

Unan evit ar Speret glan,
Unal evit an eb zo en poan,

Unal evit an eb zo en poan
hag unal evit on va himan.

—
Ne voa Ket he c'her peur lavaret
En Iliz Sant Jakes e c'heo entreet.

(109 verso)

— Ma mije me dour a gwin gwen,
Unan da respont va offeren ?

Ne voa Ked he c'her peur lavaret
Dour a gwin gwen dean zo rentet.

Rentet eus deay dour a gwinn gwen,
Unan da respont he offern.

Pa voa he offerenou laret
Da Dreid^{er} Sant Jakes eo n'em strinket

(110 verso)

— Oho Sant Jakes viniget,
Miraklo em andret o c'heus gret;

A c'hoas e raffer eur burzud
Va renter er ger e touës va zud.

Dom Yann Derrien a Choulenne
Ne Hiz parrous pa n'arrue:

— Para neve bars er bourg man,
Ma welan tud er Kaon hennan?

— Eur Belek iaouank zo Sortiet,
Boë daou vla ne ket retornet
E dud so n' Kaon bars er verret.

— Leket er Kleier da chanj Son,
Arvu er Belek bars er Chanton.

7